

136

## Al Labourer.

(56)

Air: J'ai vu la Meunière.

Me ve contant da labourat  
 Labour evit labour;  
 Me a zo eul Labourer mat  
 Diouc'h an deiz, pe diouc'h marc'hant.  
 Labour evit labour,  
 Hag eul labour vat.

Va labour a zo va mignon,  
 Labour evit labour;  
 Me a labour a greis calon,  
 Hep caout disput na rëzon.  
 Labour evit labour,  
 Hag eul labour sonn.

Ne meus get afer a arc'hant,  
 Labour evit labour;  
 A c'houlennan absolument  
 Evit va renta contant.  
 Labour evit labour,  
 Hag eul labour goant.

D'an nep a labour din e ran  
 Labour evit labour;  
 Gant plijadur e labouran,  
 Pa ellan ober dezhan  
 Labour evit labour,  
 A galon er gran.

Poan oc'h poan e labouran,  
 Labour evit labour;  
 Ma na meus labour e c'leman,  
 Labour eo a zeziran.  
 Labour evit labour,  
 Hag eul labour scan.

Me labour hep coll an amzer,  
 Labour evit labour;  
 Ober a ran mad va micher,  
 Hep na goust james re g'er.  
 Labour evit labour,  
 Ha nepus aner.

(Vol. II, p. 56-58.)